

## Gwillaouik.

Maharit a lavare deï̄s ar palahadek (1)  
Otrou Doue ma Doue d'ar ger me renk monet.

Na leverit-tu deï̄m-n'hi maharit an alc'her  
Petra e zeo ar chujet ma renkit mond d'ar ger.

Me *ar* deoc'h fenos d'am goulen mar bez kontant va zad  
enont, Guillawik Rollant a plich d'am daoulagad.

Me deor fenos d'am goulen brava den a zo er oro (2)  
enont, Guillawik rollant, mab sakrist Plouigno

Maharit a lavare er ger pa errue :

– Lakit ar pod deus an tan a lakid kig enan  
Lakit ar pod deus an tan a lakid kig ebars  
me ia da glasq al louzou evid ober ar fars. (bis)

Pa voa preparet koan Gwillaouik na deu ket  
A Maharid an alc'her eun neubeut chagrinet

ag-hi an tronoz vintin na da ti e mouereb  
en an doue ma mouereb me o ped va chikouret

Da vond da koms ma dimizi ma mouereb mar keret  
Da enont, Gwillaouik Rolland, brava den zo er bed.

– Debonjour dec'h Gwillaouik, a deoc'h-chui magerez  
Petra eo ar chujet mar zoc'h deuet dam goëlet

– Deud-omp da koms o dimizi, Gwillaouik mar keret,  
Da Vaharid an alc'her breva plac'h a zo er bed. (3)

Lavaret an n'eus-dime Maharit an Alc'her eb ober kompliment  
*-it* demeche ked er blo man nag nen doa ket a c'hoant.

Otro Doue va Doue me a zo bed manket,  
me a meus bed kavet goaset ag a meus refuzet

me a meus bed kavet goazet deus a paros plougounven.  
a zo deud do dilezel o chonjad kaoued vel.

Breman me an tou deoc'h ag en promet  
kenta hini a deuio na vo ket refuzet.

Jannton Puil, 16 juin 1851.

*(1) Peut-être le 2<sup>ème</sup> a est un u ? et alors lire : paluhadek ?*

*(2) Ms : oro ; lire : vro.*

*(3) Ms , breva ; lire : brava.*